

POST KENURZHIER SEVENADUREL, E KARG EUS AR YAOUANKIZ HAG EUS AR BREZHONEG

Deskrivañ ar post

Dindan aotrouniezh burev ar gevredigezh Emglev Bro Douarnenez, o kenlabourat gant eil goprad ar gevredigezh hag ar youlidi, e vo karget ar goprad da genurzhiañ ar gevredigezh ha da gas da benn ar raktresoù war ar brezhoneg ha war ar yaouankiz.

Kefridioù

KENURZHIAÑ, asambles gant eil goprad ar gevredigezh

Buheziñ ar vuhez kevredigezhel
Heuliañ ar budjed hag al liammoù gant ar gevelerien
Heuliañ al labour melestradurel
Kehentiñ diabarzh ha diavaez

BUHEZIÑ YAOUANKIZ

Sevel ha heuliañ raktresoù buheziñ evit ar re yaouank 0-25 bloaz, liammet gant ar brezhoneg ha sevenadur Breizh
da skouer : kampoù vakañsoù, stajoù, devezhioù dudi, darvoudoù ispisial...
Kenlabourat gant ar skolioù ha gant tud an tiriad a labour war dachenn ar buheziñ yaouankiz
Talvoudekaat sevenadur ha glad ar vro

BREZHONEG

Sevel ha heuliañ raktresoù liammet gant ar brezhoneg (krouiñ, treuzkas, lakaat war-wel, skignañ)
da skouer : emgavioù gant meur a rummad brezhonegerien, nozvezhioù c'hoarioù, dibennoù-sizhun familh, darvoudoù Dispar Amzer...
Kenlabourat gant kevelerien ar vro evit ma vefe gwelet ha klevet gwelloc'h ar brezhoneg (er strollegezhioù foran, er frammoù publik, er c'hevredigezhioù, er straedoù...)

Doare den

Barregezh da aozañ e labour e-unan, intrudu, azasaat
Darempredoù aes gant an dud ha gant ur skipailh labour
Skiant-prenet ha/pe stummadur e bed ar buheziñ (DABU, DARE, BPJEPS, DUT Carrières sociales...)
C'hoant d'en em staliañ e Bro Douarnenez / ar C'hab e-pad meur a vloavezh
Anaoudegezh hag interes e bed ar c'hevredigezhioù, e sevenadur Breizh hag en deskadurezh-pobl
Brezhoneg ha galleg mestroniet mat dre gomz ha dre skrid
Mestroniañ binvioù diazez an urzhiataerezh
Aotre bleniañ ha karr-tan

Aozioù labour

Kevrat didermen
Post diazezet e Douarnenez, mone-done e Bro Douarnenez hag er C'hab, pelloc'h a-wechoù
Amzer labour : 35 eurvezh bep sizhun, labour deus noz ha war an dibenn-sizhun a-wechoù
Gopr : strollad D feuremglev a-stroll ar buheziñ
Kregiñ gant al labour : 27 a viz Eost 2018

Kas CV ha lizher en em ginnig d'ar 6 a viz Gouere d'an diwezhatañ da : emglev.bro.dz@gmail.com ha gildas.sergent@laposte.net
Bodadoù tuta sizhunvezh etre an 9 hag an 23 a viz Gouere.